



Kleierigoù he C'halon

Komzoù gant Roparz HEMON.
Ton gant Jef PENVEN.




Mar-ja-nig koant, Mar-ja-nig drant 'Zo



aet da va - le 'hed ar stêr, A-hed ar stêr ar-



c'hant, En he daou-droa-diq botoù ler, Ha war he



fenn ur c'hoefig gwenn, Va Je-zuz! hag ur sei-



zenn, ur grib aour hag o-li - fant.

1

Marjanig koant, Marjanig drant
'Zo aet da vale 'hed ar stêr
A-hed ar stêr arc'hant,
En he daoudroadig botoù ler,
Ha war he fenn ur c'hoefig gwenn,
Va Jezuz ! hag ur seizenn,
Ur grib aour hag olifant.

2

« — Marjanig koant, lavarit din
Perak ho kwelan ken abred
Ha labous ar mintin ?
N'eo ket ar sul, ne glever ket ;
A-dreuz d'ar prad, a-dreuz d'ar c'hoad,

O lammat, o vrimbalat,
Kleier laouen ha sklintin. »

3

« — Ur c'hloc'h a vrall, ur c'hloc'h
[a son,
Ur c'hloc'h a vrimbal, ha n'eo ket
Ar sul nag ar pardon.
Met dres ul lizher am eus bet
Eus Yannig-Per, va mignon ker,
Selaouit : bez' e klever
Kleierigoù va c'halon. »

(Kanet evit ar wech kentañ gant
Mona PESKER, e Kendalc'h Naoned
ar Framm Keltiek, d'ar 16 a viz
Mae 1942.)